



PÔLE AUDIOVISUEL
DOUARNENEZ-CORNOUAILLE
POL KLEWELED DOUARNENEZ-KERNE

LENNADEG SCENARII C'HOARIET HA SONET GALV DA VENNOZHIOÙ

Evit ar 47^{vet} Festival Sinema e Douarnenez (etre ar 16 hag an 23 a viz Eost 2025) e vo aozet gant izili Pol Klewelet Douarnenez-Kerne ul lennadeg scenarii-faltazi. Displeget e vint gant komedian-ez-ed douget o mouezhioù gant tonioù nevez savet evit an lennadennoù-se, evit talvoudekaat ar pezh a oar izili ar Pol ijinañ hag ober.

Pol Klewelet Douarnenez-Bro Gerne : ul lañs a-stroll evit ar sinema, ar sonioù hag al labour-krouiñ e Kornog Breizh. Ur pol da vodañ, da ambrougañ an dud , ha da sevel oberennoù.

Ouzhpenn 130 den a-vicher a gonter er Pol: tud deus ar sinema, deus ar c'hleweled ha deus an arzoù bev. Gant ar Pol ez int skoazellet evit krouiñ, evit deskiñ da grouiñ, hag eskemm binvioù ha barreezhioù.

E 2027 e vo staliet skipailh ar Pol en uzin gozh Le Guellec, ha treiñ a raio ar savadur da "hub" lodennet: bez e vo enni studioioù, salioù da bost-produiñ, da aozañ stummadurioù, burevioù da labourat asambles hag un annez arzel ... Ul lec'h soñjet evit degemer ar saverien filmoù staliet e Breizh pe laouen da zont da filmañ er vro, ul lec'h evit reiñ startijenn da holl nerzhioù hor filieren vicherel.

Er redenn energiezh-se e vo graet al *Lennadeg c'hoariet ha sonet*, e-pad ar festival, evel ' vez graet gant Films en Bretagne e festivalioù all. Ho pediñ a reomp d'ober anavezout ho istorioù-faltazi o lenn anezhe dirak arvesterien er savadur ma labourimp en dazont !

Kasit ho mennozhioù filmoù berr, filmoù etre, filmoù hir ha stiradoù araok an ~~31 a viz Mae~~ ^{15 a viz Even} 2025, evit ober d'ho istorioù tridal ha bevañ gant c'hoari ha muzik e kalon ar festival.

Kasit ho raktres dre ar formulaoueg-mañ: <https://forms.gle/2MFLdwgqyCXns8z8>

Ma 'z oc'h komedian-ez pe sonaozer-ez, gall a reoc'h ivez lakaat ho anv dre ar formulaoueg-mañ

Kenlabour gant Daoulagad Breizh ha Gouel Filmoù Douarnenez